

I

O Tad krouer ! C'houi'gar kement ar bed-man
 M'ho peus roët buhez ho Mab evitan.
 Grit m'ho karimp d'hon tro eus a greiz hor c'halon
 Ha m'ho meulimp ervat en nenv dirag ho tron,
 En nenv dirag ho tron.

2

O Mab Salver ! c'houi ato madelezus
 'Zo'n em c'hrët den hag a zo hanvet Jezuz ;
 C'houi o peus hor prenet'n eur vervel war eur groaz ;
 Grit na vimp ket kollet, goude poaniou ker bras,
 Goude poaniou ker bras.

3

O Spered-Glan ! c'houi 'ro nerz ha sklerijenn ;
 Dirag ho tan e teuz an denvalijenn.
 Strinkit'n hor sperejou sklerded ho kwirionez,
 Tommit hor c'halonou gant groez ho karantez,
 Gant groez ho karantez.

4

O Treinded sakr ! hor mirit, korf hag ene,
 Diouz ar gwall-eur d'en em gailhara morse,
 Ma c'helloc'h chom ennomp, e-giz ebarz ho ti
 Ha rei d'hor c'halonou ar peuc'h hag an dudi,
 Ar peuc'h hag an dudi.

5

Holl draou krouet, ha c'houi holl, sent hag elez,
 Meulit ganeomp an Doue a santelez.
 Ra vo meulet an Tad, ar Mab ha ar Spered !
 Ra vo meulet bepred tri Person an Dreinded,
 Tri Person an Dreinded !

War don : Emgann an Tregont.

DISKAN :

D'an tri Person eus an Dreinded
 Kanomp ervat gant mil respet :
 Gloar hag enor war bep tachenn,
 Gloar hag enor da virviken !

I


Eun Doue 'zo, unan hepken,
 Krouer pep tra, krouer pep den ;
 Bet eo ato, be 'vo bepred,
 Ema dre holl hep harz ebet.

2

Tri Person 'zo 'barz e Doue,
 Parfet o zri e pep doare :
 An Tad, ar Mab, ar Spered-Glan,

3

Doue o zri, ha koulskoude
 'Rabat sonjal int tri Doue ;
 Unan hepken a reont o zri :
 N'eus etrezo tamm disparti.



4

Disparti 'bet n'eus etrezo ;
N'int ket mesket evelato ;
An Tad, ar Mab hag ar Spered
A jom ato gwir Bersoned.

5

Doue an Tad a zo krouer,
Doue ar Mab a zo salver,
Hag ar Spered a garantez
Eo oberour ar santelez.

6

Doue a zo eur spered pur,
Santel, santel eo dre natur,
Ha n'heller kaout en e vuhez
An distera fallagriez.

7

Galloud Doue a zo dispar :
Ober a c'hell ar pezh a gar ;
An dud krenva en e gichen
'Zo nebeutoc'h eget kelien.

8

Douar ha mor ha bolz an ne
A embann skler galoud Doue :
E hanf sakr ha benniguet
Dre ar bed-holl a zo skrivet.

9

Hen eo a vlein an heol, al loar
Hag ar stered hag an douar ;
Elec'h ebet, netra morse
Ne c'hell finval hep e ôtre.

IO

Emmell a ra ouz ar paourig,
Ouz al labous hag ar peskig,
Ouz ar prenvig an distera,
Emmell a ra ouz a bep tra.

11

Klevout, gwelout a ra pep tra,
Betek an traou ar c'huzeta :
N'eus ket eur sonj en hor spered
Hag a jomfe outan kuzet.

12

Doue a zo madeleuzus
Hag ouz an holl eo truezus :
D'ar pec'her paour, pa janj buhez,
E ro pardon ha levezuz.

13

Met Doue 'zo ive leal,
Ha gwaz a-ze d'ar re 'zo fall :
Gantan pep den a vo barnet
Hervez an hent en do heuliet.

14

Bevomp ato evit Doue ;
Bezomp d'ezan korf hag ene,
Hag en nenvou ni 'vo laouen
Ouz e veuli da virviken.